

8N3-1-006

ABBE JH. CADIOU  
CURE DOYEN

PARREZ PLABENNEC (MINISTÈRE)

PEDENNOU

HA

KANTIKOU

EVID

AN OFERENN



AN OFERENN  
CURE DOYEN  
PLABENNEC (FINISTÈRE)

**Gourc'hemenh an Iliz.** — Pep kristen, deuet d'an oad a skiant, a dle, dindan boan a bec'hed marvel, dont d'an oferenn bep sul ha bep gouel-berz (gouel Nedeleg, ar Yaou-Bask, gouel Maria Hanter-Eost ha gouel an Holl-Zent).

**Kompren ha beva an Oferenn.** — Perak ez eus tud ha ne gav ket d'ezo o dije ezomm eus an oferenn? Perak ez eus kristenien hag a gav hir an amzer tremenet en iliz ha ne zeuont betek enni nemet dre ma vez gourc'hemennet striz dont d'an oferenn?

**Ne gomprenont ket an oferenn:** bez' emaint aze dizeblant, dizoniñ, dizober, « evel peulioù »; ne gavont netra da zonal nemet lezel o spered da redek er-maez, netra d'ober nemet gortoz ar fin.

**Ne garont ket an oferenn:** n'eo evito nemet eun oberenn a relijion a jom en diavaez d'o ene ha d'o buhez, ne vevont ket an oferenn. E gwirionez, ne garoc'h an oferenn nemet gant ma teuo da veza **hoc'h** oferenn-c'houi, kristenien, dre ginnig anezi gant ar beleg, dre lakaat enni ho puhez, ha dre lakaat anezi en ho puhez: **ho puhez en hoc'h oferenn hag an oferenn en ho puhez.**

**Petra eo an Oferenn?** — Bez' ez eo, war-eun-dro, sakrifis Jezuz-Krist war ar groaz kinniget a-nevez dre zaouarn ar beleg; hor zakrifis-ni, ha sakrifis an Iliz.

1) **Eur zakrifis eo.** — Eur zakrifis a zo, da genta penn, eur c'hinnig, graet da Zoue gant an den. Perak e tle an den kinnig sakrifisou da Zoue? Da genta evit anzav ez eo an Holl-C'halloudek krouer ha mestr pep tra, evit e adori, hag ouspenn evit rei d'ezan eun digoll evit ar bec'hed, evit goulenn e skoazell hag e c'hrasou, hag evit e drugarekaat eus e vadelezou. Petra c'hell an den kinnig e sakrifis da Zoue? Dindan al Lezenn goz, e veze graet sakrifisou a bep seurt; er re gaera anezo, e veze kinniget ha lazet loened lart, pinvidika prof a gaved d'ober en eur bobl labourerien-douar.

Talvoudegez ar zakrifisou-se, sklêr eo, a jome dister e-kenver an Doue bras a dlee mab-den enori. Evit adori Doue en eun

doare dereat hag evit rei d'ezan eun digoll leun-barr ha parfet evit ar pec'hed, ne oa ket awalc'h kinnig madou ha loened krouet, ne oa ket awalc'h zoken d'an den en em ginnig e-unan e sakrifis... Met pa zeuas Mab Doue da gemer eun natur-den, neuze e voe gallet kinnig da Zoue an Tad eur zakrifis peurvat ha parfet.

2) **Sakrifis Jezuz-Krist.** — En eur vervel war ar Groaz, hor Zalver a ginnigas da Zoue e Dad eur zakrifis da dalvout da viken; en eur wech hepken e reseve Doue eun enor didermen, eun digoll didermen, en eur ger, eur zakrifis ha ne vanke nefra d'ezan, ha ne c'helle ket e dalvoudegez beza gwellaet na kresket biken, eur zakrifis parfet ha ne vo nemetan. Rak ar beleg eo Jezuz, Mab Doue, hag ar pez a zo kinniget eo Jezuz c'hoaz.

Met daoust ha ne gav ket d'eoc'h eman gwall bell diouzoc'h ar zakrifis-se, kinniget war ar C'halvar daou vil bloaz 'zo pe dost? Sakrifis ar Groaz n'eus nemetan hiviziken; padout a ra da viken, daoust m'eo eun dra 'tremenet en doare ma voe kinniget neuze (Jezuz lavet gant ar Juzevien hag ar zoudarded, hag o skuilha e wad evit gwir betek ar berad diweza).

Sakrifis an oferenn n'eo ket eur zakrifis all, distag diouz hini ar groaz. An doareou-diavaez ennan a zo dishenvel diouz re ar C'halvar, rak Jezuz ne varv ket mui, e wad n'hell ket mui beza dispartiet diouz e gorf. Met a-hend-all eo penn-da-benn ar memes sakrifis: evel war ar groaz, Jezuz eo ar c'hinniger pe ar beleg, ha Jezuz eo ivez an hini a zo kinniget. War an aoter, en em ginnig dre zaouarn ar beleg, p'eo gwir e choñ kuzet dindan spesou ar bara hag ar gwin. **An oferenn eo sakrifis ar groaz skoudennet, addispleget, nevezet.**

3) **Hor zakrifis-ni.** — Pa varve Jezuz-Krist war ar Groaz, evidomp eo e varve: en em lakaet en doa en hon lec'h, e lec'h an den pec'her; paea a rae hon die, en hon hano. Met ni ne oamp ket war ar C'halvar, evit en em unani gantan ha kinnig anezan e sakrifis da Zoue.

Evit-se en deus hor Zalver diazezet an oferenn: evit ma c'hellimp d'hon tro kinnig, a-unan gant Jezuz beo da viken, ar zakrifis graet gantan en hon hano, evit ma vezo e Zakrifis hor zakrifis-ni ivez.

Ha setu perak, epad an oferenn, e tleomp, e-lec'h eom di-zober ha dizoni en iliz, kemerout perz er zakrifis: da heul Jezuz,

oc'h en em ginnig e-unan da Zoue dre zaouarn ar beleg, **kinnigomp anezan hag en em ginnigomp hon-unan.** En em ginnigomp hon-unan; hor c'horf gant e holl skianchou, hor spered, hor c'halon, **hor buhez pemdeziek** evel m'ema-ni, gant he foaniou, he labourioù, he levenez, gant soursiou pe brederioù hor familh; hor micher hag hor bro. Ha war an holl draou-se, lakaomp da veza hor re-ni sonjou ha mennadou Kalon Jezuz, e garantez evit ar mad, e gasoni ouz ar pec'hed.

Ma vevit an oferenn evelse, kristenien, e vezo ar Zakrifis santel en ho puhez evel an heol war an douar: nerz ha sklerijerin.

4) **Sakrifis an Iliz.** — Ma 'z eo gwir e oamp-ni dirak daoulagad Jezuz war ar Groaz, n'emaomp ket hon-unan. E sonj Jezuz eman e Iliz santel, an holl eneoù santel o deus bevet, a vev hag a vev war an douar.

Hor Zakrifis eo an hini bet kinniget a holl viskoaz **gant an holl Zent**, dreist-holl gant ar Werc'hez Vari; bez' ez eo hini an Iliz o veva breman war an douar: zoken pa vez eur beleg o lavarout an oferenn ouz eun aoter vihan, gant eur c'huirust hepken en-dro d'ezan, n'eo ket e oferenn d'ezan eo, met ar zakrifis kinniget dre e zaouarn a zo, e gwirionez, Sakrifis Jezuz-Krist hag an Iliz a-bez.

### Pedennou da lavaret epad an Oferenn

#### Pa vez ar beleg e-traon an Aoter:

Treinded Sakr, Tad, Mab ha Spered Santel, eun Doue hepken e tri Ferson, — evit ho meuli hag hoc'h adori evel m'eo dleet — eun deut d'an Oferenn-man. — N'oun ket dir a gement-se, — met c'houi, o va Doue, — netait va c'houstians, — tommit va c'halon gant tan ho karantez, — ha taolit ivez hepken ouz meritou ho Mab, — a zo war-nes diskenn war an Aoter-man, — evit adnevezi dirazomp Sakrifis ar Groaz.

#### War don: O Sakramant burzudus!

Gant fizians ha gant resped,	C'houi a zo ken didamall,
Setu ni, Doue karé,	Ni, siouaz! a zo ken fall!
O pedi ho madelez	Met hor c'heuz a zo gwirion:
Da gemer ouzomp truez.	D'eoamp eta roit ar pardon.

**Eus an Introït betek al Lizer-abostol :**

O va Doue, — na me 'garfe kaout em c'halon eur c'heuz gwirion d'am fec'hejou! — Nag e karfen beza brevet gant ar glac'har, — evel ma voe brevet va Zalver benniget e liorz an Olivéd, — p'edo a-stok ouz an douar, daelou leun e zaoulagad, — e gorf goloet gant eur c'houezenn a wad, — o pedi hag o c'houlenn pardon evidoun. — Me am eus pec'het enep va Zad ha va C'hrouer.

O va Doue, — anzav a ran va fallagriez, — va zikourit da rapari an droug am eus graet d'eoc'h. — En amzer da zont, e fell d'in, gant sikour ho kras, — trei kein d'ar pec'hed ha da gement tra a zoug d'ezan.

N'omp nemet tud didalvez,  
Met ar Zent hag an Elez  
Evidomp ho ped, Aotrou:  
Selaout o fedennou.

Skuilhit warnomp sklerijenn,  
Ma komprenimp ho Lezenn;  
Roit gwir feiz d'hor sperejou,  
Gwir zoujans d'hor c'halonou.

**D'an Aviel:**

O va Jezuz, sklerijenn ar bed, — na bermetit ket e lezfen da vont da goñ — ar pez ho peus graet evit va zilvidigez. — Tud 'zo hag a vev dalc'hat — evel pa gredfen eun aviel kontrol d'ho hini, — aviel ha lezenn ar bed; — na c'houzanvit ket, o va Doue, — e vefen henvel outo: — roit d'in ar c'hras da zispriza, evel ma tlean, — madou, enoriou ha plijaduriou ar bed-man; — roit d'in ar c'hras da zougen va foaniou gant nerz-kalon, — da gemer atao skouer diwarnoc'h — ha da vev a bepred hervez lezenn santel hoc'h Aviel.

Ni a vo atao fidel  
Da garet an Aviel,  
Ha da ober, penn-da-benn,  
An holl draou a c'hourc'he-

Dre an Iliz, va Doue,  
C'houi 'geleñn ho pugale;  
Rak-se 'ta hep damanti,  
Ni 'zento bepred outi.

[menn.

**D'ar C'hinnig pe Ofertouer :**

Tad Santel-meurbet, — me a ginnig d'eoc'h ar bara hag ar gwñ — a vezo chenchet bremaik e Korf hag e Gwad Jezuz Krist, ho Mab.

O c'hinnig a ran d'eoc'h — evit anaout ha diskleria ho kaloud war an dud, an aelez hag ar bed holl.

O c'hinnig a ran d'eoc'h — evit paea d'eoc'h dle va fec'hejou.

O c'hinnig a ran d'eoc'h — evit ho trugarekaat eus an holl vadou ho peus roet d'in.

O c'hinnig a ran d'eoc'h — evit kaout diganeoc'h an holl c'hrasou am eus ezomm da gaout, — evit heulia ho kourc'hemen-nou ha savetei va ene.

Unañet gant Jezuz Krist, ho Mab, e kinnigan d'eoc'h ive va danvez, va yec'hed, va brud, va zonzou, va c'homzou ha va oberrou, — ha prometi 'ran d'eoc'h e c'houzanvin breman gant doujans — kement tra a zigouezo ganin a-berz ho polontez santel.

D'eoc'h aman ni a ginnig  
Pasion ho Mab unik:  
N'eus nemet an tenzor-se  
Hag a c'hell paea hon dle.

Gwad ho Mab, skuilhet er groaz,  
Evidomp a brezeg c'hoaz:  
Klevit mouez e garantez,  
Hag ouzomp ho pet truez.

**D'ar Profas :**

O va Doue, — nag eürus oun breman o kana ho meuleudi — asambles gant aelez ar baradoz! — Na plijout a ra d'in. — embann dirak an holl ez oc'h santel meurbet!

O Jezuz, va Zalver, — me 'gred start emaoch o vont da ziskenn war an Aoter. — Pa vezoc'h deut en hon touez, — me a ginnigo d'ho Tad ho meritou hep muzul, — ha me 'lavaró d'ezan: — Aotrou Doue, dre veritou ho Mab, — skuilhit ho pennoz war an Tad Santel ar Pab, — an Aotrou 'n Eskob, — hor beleien, ha kement hini 'zo karget d'hor sklerijenna; — kelennit ar poblou hag ar re a zo en o fenn; — ho pet truez ouz an dud divadez, an heretiked hag an holl bec'herien. — Benniget dreist-holl — va c'herent, va mignoned, va madoberourien hag holl dud ar barrez-man.

O Tad leun a drugarez, — c'houi hag a lak an heol da bara war an dud fall koulz hag ar re vat, — ho pedi a ran ivez — evit ar re o deus kasoni ouzin pe o deus noazet d'in; — a-greiz kalon e c'houlennan evito — kement gras am eus c'hoant da gaout evidoun va-unan.

**War don? Adoromp holl.**

Evit embann ho mil ha mil madelez,  
 E kanomp holl a-unan gant an Elez,  
 Gant an Elez nijet eus lein ar baradoz  
 Da gana d'eo'h aman meuleudi ha bennoz.  
 Hastit, Aotrou, dont buan eus an nenvou  
 D'en em ginnig evit rak hor pec'hejou...  
 A! bezomp evurus, rak Jezuz a ziskenn,  
 Met chom a ray kuzet ouz daoulagad hor penn.

**Araok ar Gorreou :**

O va Doue, — setu deut an eur eyidoc'h da ziskenn war an Aoter. — Me ho ped, sklerijennit va spered, — tommit va c'halon, — evit ma c'hellin ho tigemer evel m'eo dleet.

Deuit, Salver Jezuz, — deut, va Mestr ha va Roue, — da nevez dirazomp Mister bras hor zilvidigez, — ho Sakrifis war ar groaz.

Ha c'houi, Gwerc'hez santel, Elez ha Sent ar baradoz, — pedit evidoun, — evit ma c'hellin, a-unan ganeoc'h, — adori va Doue gant feiz ha karantez.

**Raktal goude ar Gorreou :**

O va Jezuz, osti a zilvidigez,  
 A zigor d'eomp hent benniget ar vuhez,  
 Ni hoc'h ador breman, aze war an Aoter,  
 Gant ho Korf hag ho Kwad dindan spesou dister.

Gwad talvoudus, war an Aoter kinniget,  
 Ra vo ganeoc'h kounnar Doue peur-drec'het;  
 Ika vo gwalc'het da vat hor pec'hejou ken bras,  
 Ra vo lakaet Satan dinerz-holl ha dinoaz.

Ma kaver gwelloc'h, e c'heller kemer ivez ar c'haantik: Me ho salud, Korf va Zalver (n° 55).

**Eus Memento an Anaon betek ar Bater :**

O va Jezuz, emao'h eta breman war an aoter, — o kinnig d'ho Tad, evit ar re veo hag ar re varo, — ho Korf santel hag ho Kwad priziuz. — O va Doue, digorit dor ar baradoz — da

eneou paour ar purgatory — ho pet truez dreist-holl — ouz va c'herent, va mignoned ha va madoberourien.

Evidomp-ni, pec'herien, hag a zo c'hoaz war an douar, — n'hon dilezit ket kernebeut. — Holl asambles, gant feiz ha gant fizians, — e kasomp d'eo'h, Tad Santel, — ar bedenn gaer bet dsket d'eomp gant ho Mab. — Ni ho ped, selaouit gant madelez mouez ho pugale:

Hon Tad hag a zo en nenv, — hoc'h hano bezet santifiet, — ho Rouantelez deut d'eomp, ho polontez bezet graet war an douar evel en nenv. — Roit d'eomp hirio, hor bara pemdeziek, pardonit d'eomp hon ofansou, evel ma pardonomp d'ar re o deus hon ofanset, — ha n'hon lezit ket da goueza en detansion, met hon dilivrit diouz an droug. — Evelse bezet graet.

**Eus an « Agnus Dei » betek ar Gomunion :**

Na me 'garfe, Salver Jezuz, — senti ouz ho mouez madele-zus, — ho reseo em c'halon dre ar gomunion, — hoc'h adori eno ha komz ganeoc'h eus va ezommou. — Met, siouaz! nag a be-c'hejou am eus graet! nag a lec'h am eus da skei war va feul-trin! — Pardon, va Doue, — pardon evit va fallagriez tremenet!

Hiviziken, me 'ziwallo gwelloc'h; — me 'gaso pell diouzin kuzulou fall ar bed hag an drouk-spered, — he me 'dostaio ouz an Daol Zantel gant feiz ha gant karantez.

Netait, o va Doue, — netait va ene paour, — va lakit e stad vat d'ho reseo dre ar gomunion.

**War don: O Elez ar Baradoz.**

O Jezuz, Oan dous meurbet, c'houi a zo bet lazet  
 Evit paea dle spontus an dud 'vit ar pec'hed.  
 Kasit ho labour da penn, Salver karantezus:  
 Gwalc'hit, gwalc'hit va c'halon gant ho kwad presius

Penaos kredi daoulina ouz Taol sakr ho panked,  
 Goude m'oun bet alies ken klanv dre ar pec'hed?  
 Met gant eur gomz, va Zalver, c'houi 'hell va farez;  
 Naon bras he deus va c'halon: deut buan d'he maga.

**Eus ar Gomunion betek fin an Oferenn :**

O va Doue, — penaos e c'hellin-me ho trugarekaat — evit kement-all a vadou ho peus roet d'in 'hed va buhez? — Va e'hrouët ho peus dre garantez evidoun, — va gouzanvet ho peus daoust d'am fallagriez, — va galvet ho peus da zistrei dave-doc'h, — ha ken lies gwech ma 'm eus bet keuz d'am fec'h'ejou, — ho peus pardonet d'in.

Hirio c'hoaz, — nag a vad a rit d'in-em c'horf hag em spered, — nag a c'hrasou ho peus roet d'in epad an Oferenn-man, — nag a boan a gemerit evit va diwall diouz an ifern!

Evit ho trugarekaat a gement-se, o va Doue, — setu ma kin-nigan d'eoc'h ar priziusa tra 'zo er bed-man: — Korf ha Gwad Jezuz Krist ho Mab.

O c'hinnig a ran d'eoc'h, — gant meritou e Basion hag e varo, — adnevezet war an aoter-man epad an oferenn; — ha prometi a ran d'eoc'h, gant sikour ho kras, — e sentin hiviziken ouz ho lezenn hag e rin pinijenn.

O va Jezuz benniget, peseurt anaoudegez  
A c'hell, a-berz eur pec'her, respont d'ho madelez?  
Kemerit da vihana va c'horf ha va ene,  
Va spered ha va c'halon: d'eoc'h int, o va Doue!

Pebez mister burzudus! ni a zo reuzeudik,  
Ha dre c'hras an Oferenn ez omp graet pinvidik:  
Enni tenzor Mab Doue dirazomp 'zo digor...  
Diwallomp da zisprizout eun hevelep tenzor.

Benniget, o va Doue, an holl zonzou mat hon eus graet epad an oferenn-man — Roit d'eomp ho pennoz dre zaouarn ho peleg, — da jom atao war bep-hini ac'hanomp, — evit ma c'hellimp ho servicha mat war an douar-man, — ha mont eun deiz d'ar Baradoz d'ho kwelout ha d'ho meuli, eürus da viken.

En hano an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. Evelse bezet graet.

**Kantik an Oferenn**

**Ar beleg e-traon an aoter, hag an Introït :**

Stouet, pec'her, aman dirak an aoter,  
Dirak va Mestr, hag hep dale va Barner,  
Me 'zeu, leun a fizians hag evit kaout pardon,  
Da skei dirak an holl e-kreiz poull va c'halon.

Diskouezet d'eomp, va Doue, ho trugarez,  
Ha, dre ho komz, ni 'vezo pur a-nevez,  
Evit tostaat ouzoc'h, sevel gant ar beleg  
Ouz aoter ar C'halvar, tron an Holl-C'halloudek.

**Kyrie, Gloria in excelsis :**

Treinded santel, ouzomp-ni ho pet truez!  
Ha ni 'gano, a-unan gant an Elez:  
Gloar da Zoue en nenv, ha peoc'h war an douar  
Da vugale Doue, peoc'h d'an hini e gar.

**Pedenn :**

Ni 'zo dister, ha c'houi 'wel hor paourentez;  
Met evidomp e ped ar Zent, an Elez.  
Selaout o moueziou, ha selaout Jezuz,  
Ha dreizan evidomp bezit trugarezus.

**Lizer-Abostol :**

Gant 'n Abostol, pe an Testamant kenta,  
Klevomp breman ar c'henteliou santela;  
Kreskit, o va Doue, hor feiz en ho lezenn,  
'Vit ma vezo tommoc'h hor c'halon er bedenn.

**Aviel ha Credo :**

En Aviel e komz Doue e-unan,  
Savit 'n ho sav evit selaou anezan.  
Bennoz d'eoc'h, va Doue, da veza lavaret  
Ar pezh 'zo da ober, ar pezh 'zo difennet.

Kredi a ran komzou an Iliz santel,  
Senti outi a fell d'in betek mervel.  
Dreizi e komz Doue, ha n'hon eus ket daou hent  
Da gaout ar wirionez 'vit mont da vro ar Zent.

**Prof pe Ofertoner ha Lavabo :**

Kinnigomp holl, a-unan gant ar beleg,  
Gwin ha bara, magadurez pemdeziek,  
Evit beza chenchet e korf, gwad'hor Zalver,  
Da vaga hon ene : na pegen bras mister !

Ni 'ginnig d'eoc'h hor c'halon hag hon ene,  
War an aoter da veza chenchet ive :  
Gwalc'hit hon eneu, kasit peil ar pec'hed,  
'Vit ma ne vo ennomp nemet Doue kavet.

**Orate, fratres :**

Pedit, breudeur, 'vit ma plijo da Zoue  
Hor sakrifs, rak hoc'h hini eo ive :  
Ra blijo da Zoue, evit e vrasa gloar,  
Evit mad hon ene hag Iliz an douar.

**Prefas ha Sanctus :**

Evit meuli Doue an holl zantelez,  
Savomp hor mouez da heul hini an Elez.  
N'eus netra 'bet' ken just, rak Hen eo hon Aotrou,  
Ar Mestr war an douar kerkoulz hag en nenvou.

Santel, santel, lavaromp teir gwech santel.  
Eo hon Doue, e barr an nenv ken uhel.  
War an douar ive, kanomp d'ezan bennoz,  
Pa blij gantan diskenn eus gloar ar baradoz.

**Araok ar Gorreou :**

Pedomp breman, unanomp hor c'halonou  
Gant ar beleg, selaouomp e bedennou :  
Pedi 'ra 'vit an holl, 'vit ar Pab, an Iliz,  
Evit brasa ezommou ar re 'zo en ofis.

**Goude ar Gorreou**

Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,  
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver.  
Spersjou evurus, Elez ar Baradoz,  
Gant karantez a dan meulit-hen dez ha noz.

**Pa 'z eo stouet ar beleg :**

Kannad Doue, kemerit war an aoter  
An Osti sakr ha sakrifs war Zalver,  
'Vit o c'has d'an nenvou, da baea evidomp,  
Ma koezo adarre pardon Doue warnomp.

**Memento ar re varo :**

Ho pezet sonj eus ho pugale garet  
A zo en tan, gant ho justis kantizez.  
Merket int gant ar feiz ha gant ho karantez ;  
Ore c'hras ho sakrifs, ho pet outo truez !

**Pater noster :**

Doue hon Tad, dre holl ra vi/ot meulet,  
Ho polontez dre holl ra vezo heuliet ;  
Ro/it d'an dud bendez an tamm bara 'zo ret,  
Ha diwallit hon ene diouz bilim ar pec'hed.

**Agnus Dei :**

War ar C'halvar, Jezuz, c'houi ho peus paeet  
Dle ar pec'hed, an eneu 'peus prenet ;  
Ni ho ped, Oan Doue, ho pet truez ouzomp,  
Ha ro/it d'eomp ar peoc'h, skuilhit ho kras warnomp.

**Domine, non sum dignus :**

Pegen kaer eo tostaat ouz an daol zantel !  
Met, siouaz d'in, penaos sevel ken uhel ?  
Rak me 'zo eur pec'her, re baour eo va ene...  
Met lavarit eur gomz, hag e vezin pare.

**Goude ar Gomunion (ton : Ni ho salud, Rouanez an Eile) :**

O va Jezuz, penaos breman diskouez,  
Hor c'harantez 'vit ken bras madelez ?  
Ni 'roio d'eoc'h hor c'halon, hon ene,  
D'ho kanmeuli 'pad an eternite.

Araok mont kuit gant bennoz ar beleg,  
Pardonit d'eomp mar d'omp bet lezirek  
Da heulia mat an Oferenn zantel ;  
Ha c'houi, Mari, ro/it d'eomp ho skoaz il.

Eun deiz da zont, holl en-dro d'hor Zalver,  
 Er Baradoz, dizolo ar mister,  
 Ni a gano bennoz da Vab Doue,  
 Salver ar bed, hor Mestr hag hor Roue.

### KANTIK AN OFERENN

*Diskan :*

Kinnigomp holl ar zakrifis  
 Gant hor Mamm zantel an Iliz  
 Sakrifis diviñ Hor Zalver  
 En em ginnig war an aoter.

1. E sakrifis an oferenn,  
 Jezuz a ra d'e veleien.  
 Nevezi 'n eun doare hispar  
 Sakrifis meur Menez Kalvar.
2. An oferenn ! Pebez tenzor !  
 Dreizi Doue a gav enor,  
 Dreizi e teu d'hon eneou  
 Bennoz Doue gant e c'hrasou.
3. Va Doue, d'eo'h e kinnigan  
 Gant doujans an oferenn-man,  
 D'ho'h adori, da ziskleria  
 Ez oc'h hor Mestr ha Mestr pep tra.
4. Ouspenn, 'vit ho **trugarekaat**  
 Da veza 'n hor c'henver ken mat :  
 Holl diganeoc'h hon eus bemdez  
 Madoberou, grasou nevez.
5. Siouaz ! 'n hor buhez tremenet,  
 Omp kouezet mil gwech er pec'hed ;  
 Jezuz, dre verit ho poaniou,  
 Pardonit d'eomp hor pec'hejou.
6. Dre an oferenn-man ive,  
 Plijet ganeoc'h, o va Doue,  
 Pa 'z eo ken paour hon eneou,  
 Rei d'eomp aluzenn **ho krasou.**

ABBÉ JH. CADIOU  
 CURÉ - DOYEN  
 PLABENNEC (FINISTÈRE)

7. Kinnig a réomp an oferenn  
 'Vit ezomou ar bed kristen,  
 Met, evit tud ar barrez-man  
 E fell d'eomp pedi dreist pep tra.
8. Ouz an Anaon, o va Jezuz,  
 Grit ivez eur zell truezus ;  
 Ro/it d'ezo, dre 'n oferenn,  
 Ar peoc'h a bado da viken.
9. Gwerc'hez Vari, va Mamm garet,  
 E-harz ar groaz ken glac'haret,  
 Va zikourit da skriva doun  
 Pemp gouli Jezuz em c'halon.
10. Ha c'houi, holl Zent ha Sentezed,  
 Ha c'houi, holl Elez venniget  
 Hor zikourit dre ho pedenn  
 Da glevet mat an oferenn.

### O SAKRAMANT BURZUDUS

1. O Sakramant burzudus,  
 'Lec'h omp maget gant Jezuz :  
 Ennan eman hor Zalver,  
 Kredi a ran war e c'her.

*Diskan :*

Adoromp Doue,  
 E Sakramant e garante !

2. Jezuz, d'an noz raok mervel,  
 'Ro galloud d'an Ebéstel  
 Da jench ar bara, ar gwin  
 'N e gorf hag e wad diviñ.
3. Ar beleg, d'ar gorreou,  
 A lavar e wir gomzou,  
 Ha raktal Jezuz-Salver  
 A ziskenn war an aoter.



4. Hep tec'hout diouz an nenvou,  
E teu war an aoteriou.  
Hag e chom ganeomp noz-de,  
Dalc'het gant e garante.
5. N'eus mui na gwin na bara,  
N'eus nemet Jezuz aman:  
E gorf sakr, e wad divin,  
'Lec'h ar bara, 'lec'h ar gwin.
6. En osti n'her gwelomp ket,  
Kuzet eo 'giz eur spered;  
E pep-tamm a-bez eman,  
Hep na c'hellfed e ranna.
7. Neb a ya d'an daol zantel  
E stad a bec'hed marvel,  
Gwir Judaz, treitour euzus,  
A ra eun torfed spontus.
8. Neb a ya pur e galon  
A gav eun tenzor gwirion:  
Gant buhez Salver ar bed,  
E vuhez 'vo unanet.
9. Adoromp hor Roue bras  
En nenvou ha war ar groaz;  
Adoromp hor gwir Zalver  
E Sakramant an Aoter.

### AKTOU ARAOK KOMUNIA

#### Kaout feiz

1. Kredi a ran, o va Zalver,  
En em gavit war an aoter?  
Dre an osti, Doue gwirion,  
C'houi a ziskenno em c'halon.

#### Kaout eur galon izel

2. Met piou-oun-me, o va Zalver,  
Evit kredi ho tigemér?  
N'oun ken nemet fallagriez,  
Ha c'houi zo leun a zantelez.

#### Kaout keuz d'ar pec'hed

3. Sellit, sellit ouz va daelou,  
Pardonit c'hoaz va fec'hejou.  
Eur gomz hepken, Aotrou Doue,  
Ha va ene a vo pare.

#### Kaout fizians

4. Daoust d'am buhez nebeut Kristen,  
E fell d'in mont en ho kichen;  
Fizians am eus, o va Jezuz:  
C'houi a zo ken karantezus.

#### Kaout karantez

5. O va Zalver, na me ho kar!  
'Vidoun oc'h bet war ar C'halvar,  
Oc'h bet er groaz teir eur amzer,  
Hag e chomit war an aoter.
6. O va Jezuz, na me ho kar!  
Dreist an holl draou war an douar!  
O va ene, redomp founnus  
D'en em vaga ouz taol Jezuz.

### AKTOU GOUDE KOMUNIA

#### Adori

1. O va ene, bezomp eürus!  
Ennomp breman eman Jezuz.  
Warnomp buan preñnomp an nor,  
Ha chomomp sioul gant hon tenzor.
2. War va daoulin stouet izel,  
Me hoc'h ador, Salver santel,  
Me hoc'h ador, Den ha Doue,  
C'houi eo va Mestr ha va Roue.

#### Karout

3. P'am eus ar c'hras ken talvoudus  
D'ho kaout ganin, o va Jezuz,  
Gant levezet me a lavar:  
O va Zalver, na me ho kari.

4. Ya, n'eur dridal e lavaran:  
O va Mestr mat, nag ho karan!  
Met ra gresko ennoun bemdez  
Tan' d'udius ho karantez!

**Trugarekaat**

5. Mil bennoz d'eoc'h, o va Doue,  
A zo diskennet em ene.  
Met kaer am bo trugarekaat,  
N'hellin morse ho meuli mat.
6. Sent hag Elez madelezus,  
Evidoun-me meulit Jezuz.  
C'houi, dreist pep tra, Gwerc'hez Vari,  
Kanit d'ezan mil meuleudi.

**Kinnig**

7. Me a garfe, o va Zalver,  
Beza brokus en ho kenver,  
Met petra d'eoc'h 'hellfen kinnig,  
Pa n'oun nemet eur reuzeudig?
8. Da vihana, o va Doue,  
Me 'n em ro d'eoc'h korf hag ene,  
Da labourat evit ho kloar,  
Keit ha ma vin war an douar.

**Goulenn**

9. Me a zo bresk, o va Jezuz,  
Hag an henchou a zo risklus:  
Va skoazellit eta bepred,  
Evit ma kerzin hep lamm ebet.
10. Grit ma tec'hin diouz ar pec'hed,  
'Giz ma tec'hfen diouz an naered,  
Ha ma renin hiviziken  
Buhez dinamm eur gwir gristen.

ABBE JH. LADOU  
CURÉ DOYEN  
PLABENNEC (FINISTÈRE)